

KANTIG DA ZANT ALBIN

DISKAN: Sant Albin, eus lein an Nenvou
 Selaouit ouz hor pedennou;
 Beilhit warnomp gant karantez,
 Hon diouallit 'pad hor buhez:
 Meulomp a greiz kalon
 Sant Albin hor patron.

1. E bolz an Nenv holl hep stagel
 Dreist at bed-ma savet uhel
 Pa lugern ar stered en noz
 Kaer eo mantell ar baradoz.
2. A dud kristen ha pinvidik
 C'houi 'zo ganet e Languidik;
 Grit ma vo luskellet e Breiz
 Kalz danvez sent, skedus o feiz.
3. Eur mestr gouiziek, santel ha fur,
 Ho kentelias, kren-grouadur;
 Grit ma vo holl hor bugale
 Kelennet veldoc'h hep dale.
4. Yaouank, divlamm, leun a spered,
 C'houi dec'has a-grenn diouz ar bed;
 Grit ma kerza hor yaouankiz
 war hent ar furnez e pep giz.
5. E Sinsilliag c'houi a zo bet
 Manac'h sentus, Abad karet;
 Grit ma vo aman e pep ty
 An tad, ar vamm, ar gwir vistri.
6. Seiz vloaz war-n-ugent en Anjer
 Eskob brudet 'hed an amzer;
 Grit deomp kassât, veldoc'h gwechall,
 Dreist kement droug, ar gizioù fall.



